

## KANTIK

EN HENOR

## D'AN ITRON VARIA CREAC'HIGUEL

1

Salud d'eoc'h Mari, Rouanez  
Euz an Env hag an douar !  
Salud d'eoc'h Mam a drugarez  
A greiz kalon ni lavar :

*Diskan*

Itron Varia Creac'higuel,  
Klevit mouez ho pugale ;  
Hed hor bue, ô Mam santel,  
Hon diouallit noz ha de.

2

Choaset a bep eternite  
Da veza mam da Jezus,  
Roet oc'h da yam d'eomp ive,  
C'houi hon rento oll eürus.

3

Lec'hiou santel a zo merket  
Da henori ar Verc'hez,  
Hi a skuilh varnomp bepret  
Tenzoriou he madelez.

4

Chapel Creac'higuel zo brudet  
Dre ar burzudou dispar,  
A ra ar Verc'hez benniget  
En kever an nep he c'har.



5

Evit dont beteg Creac'higuel,  
Pelerinet gant guir feiz  
Da bedi ar Verc'hez Santel  
A dreuz pevar c'horn a Vreiz.

6

Aliez an henchou o gueler  
O herruout a bell braz,  
En eur bedi daoust d'ho skuizder  
Daoubleget var ho fenn-baz.

7

Evidomp-ni oll Bretoned,  
A lavar a vouez huel :  
Kent evit mankout d'ho karet  
Ni ve guell ganeomp mervel.

8

Dirag hor imach benniget  
En Creac'higuel ni bedo.  
Pa vemp tentet pe glac'haret  
Gant fizians ni a gano :

9

Pedit evidomp, Mam Doue,  
Digant Jezus goulennet  
Ma saveteimp hon ene  
O kenderc'hel d'ho karet.

---

**Imprimatur :**

Quimper, le 15 Mai 1893,

E. FLEITER, Vic. gén.

---

Kemper, Moullerez ru an Duçhenfil.